



CHANSON NEVEZ,  
VAR AR GUEMENERIEN AUTRONEZ.

*Var ton Chanson ar C'hase.*

**E**BARS er blavez presant, en dec a vis guenver,  
E riu d'am speret post un anter-heur amser,  
E vit rimal ur chanson, ha gent ma luisso,  
Na vezo den contristet a guement e c'hléva.

✱

O compren betore tud en devez gonect  
Var an oll etadourien, dre bevar c'horn ar bed:  
Ar re a voa'n distera, hervez va santimant,  
A so huella montet en amser so presant.

✱

O tisqen e Montroules, o tonet deus ar guar,  
Me a so bet surprenet gant ur mæstr Qemener,  
O clévet e voa ret din lemel va zog dezâ,  
Pe e rage d'ar geandarm ractal ma luissona.

13. \*

Cousgoude er memes kær me amens-passeet  
 Mæstrou-barq. geandarmeri ha negociantet,  
 Heb ma zon bet en danger da veza prisonier,  
 Qen a voa dia erruout gant ur mæstr Qemener.

\*

O sina va fasse-port e ty ar Mær on bet,  
 Ha mar qeret va c'hredi ez on eo em dromplet:  
 Deus an depegnation demeus ar C'hemener,  
 Me a meus én qemeret evit an Autrou Mær.

\*

Me a c'houlen hep apel petra eo ar ræson?  
 Hoc én so erru ur Princ abeñs Napoleon?  
 Va c'hompagnon a respont dime e guirione:  
 N'eo deo na princ na baron ~~...~~ C'HEMENER !

\*

Breman so'n anter-cant vlas e voa bet an amser  
 Ne vije qet grêt un den gant pévar Guemener;  
 Mæs brêman e c'her-tentân en amser so e ren,  
 Da ober ur C'hemener e renqer pévar den.

\*

Mont a ra'n Negociant da brena un habit,  
 Cass gautan e Guemener, ha ma savas tabit  
 Ere tud a voa er stal hac ar guerser mezer,  
 Ma rent an Negociant demeus ar C'hemener.

\*



No. 19

Gonde ma voa me uiet ha troc'het ar meser  
 Ar macc'hadour a selle demeus ar C'hemenet;  
 Da rei dezân da gompren da bed heur eus an de  
 Gant aour an Negociant eva guin ha cafe.

✱

Rac, songet, va mignonet, d'ober eur giletet,  
 Ne ranget james qemer ouспен anter-goalent;  
 Ha c'hoas e tlelet renta ar pez a chom en to;  
 Mas ar C'hemenet Autrou o zol tout bars er rû.

✱

Emedi dre ar c'hæriou ar botret disourci,  
 O qerzet voar ar tuyou gante eur paraplu.  
 N'en deus map negociant pinvidic eus a guar  
 Ha guement so accouret evel eus C'hemenet.

✱

Deus Paris so arruet un tamic Qemenet,  
 Gant ar stad a so ennan, me gred e nichle'n ter.  
 Ya, emezan, evit greg me fell din un itron.  
 Rac vit merc'h'eun ouvrier ne deo qet eus va zon.

✱

Bremanso anter-cant vras o doa ur marc'h qienet,  
 Er C'hastel e Montroules, hervez amens deuet,  
 D'ober fest Qemenetien devez o c'hoariout  
 Mas bremâ ez int bevet gant ar poulardennon.

✱

Cals a dud en deus haavi deus ar Guemenetien.

4720.

Rac beza o deus pouvoar voar an etadourien;  
 James devez na gollont evit glao na tourmant,  
 O cana, o c'huitella e touchont o arc'hant.

\*

M'hoped, tadou ha mamou, ar te'n eus bugalc,  
 Pere o devez desseign da rei avantach dê;  
 O c'hesset-int d'ar c'hæriou da veza Qemener,  
 Hac e refont ho fortun en un neubeut amzer.

\*

Pebez pligeadur am bez, hac a dlesfen da gaout  
 O velet eur C'hemener demeus a guær o caout  
 Qen alies a nados ebars e ziou sesqen  
 Evel en em gaf a doul ebars en e vesqen.

\*

~~ODE~~ — Cell Air eus ar Guemenerien,  
 Rac me so un tremeniat ne c'houlan choqi den;  
 Chetu me amâ hirio, varc'hoas e chenchin qær:  
 Eru en penn va beach, qên a vo QEMENER!...

FIN.